

HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Notennoù	22

Herve **LATIMIER**

BRETAGNE : L'essentiel,
kenurzhiat gant
Jean-Jacques Monnier,
Skol Vreizh, 2020,
192 pajenn, 14€



Raktres al levr-mañ zo bet hini Patrick Malrieu, Doue de bardono, ha Jean-Jacques Monnier evit stankañ an toull a oa abaoe ne veze kavet ken *Breizh hor Bro* al levrig bet embannet meur a wech gant *Kendalc'h*, etre dibenn ar bloavezhioù 50 hag ar bloavezhioù 70. Hep mar ez eus

ezhomm eus ul levr a ginnigfe peadra d'ober anaoudegezh gant Breizh d'ar Vretoned ha d'an dud all, o vezañ pinvidik a-walc'h en ur chom berr ha simpl. Deut eo a-benn *Skol Vreizh* da seveniñ ar raktres. Kavout a reer e *Breizh berr-ha-berr* an diazezoù e-keñver, istor, douaroniezh,

yezhoù, lennegezh, sevenadur, arz hag endro.

Pep pennad a zo sinet gant an oberour. Un dra vat eo. Gellout a reer evel-se gouzout « eus pelec’h e komz » pep hini. Dibabet ez eus bet arbennigourien war bep tachenn evel-just.

Pennadoù zo a bled gant traoù anavezet met diazez. Reoù all a zegas ur sell nevez ha danvezioù nevez. Soñjal a ran e Patrice Dréano, Lukian Kergoat, Pascal Rannou, Iffig Poho, Patrick Hervé, Anna Quéré, Annaig Gorju hag Iffig Castel, Jean-René Le Quéau, Yvon Ollivier, Yves Lebahy, François de Beaulieu hag Alain Cédelle. Gwelet a reer e talc’h kont ar skipailh eus cheñchamantoù ar bed abaoe ar bloavezhioù 1970.

Evel-just e vezer dedennet muioc’h gant pennadoù zo eget gant reoù all. Plijet on bet, diouzh ma zu, gant pennad Lukian Kergoat, *L’histoire du brezhoneg*, ma adkaver traoù en doa displeget en e bennadoù el *Liamm diwar-benn ar S. D. E. G.* – Sindrom Dic’hallusted d’em Em Gompren – (niv. 382 ha 384) ma skub sorc’henn « brezhoneg ma mamm-gozh ». Desket em eus kalzik traoù e pennad Anna Quéré, *Musique et Danse*. Fent

em eus bet o lenn « *Ces pratiques connaissent un lent déclin à partir de 1880, mais perdurent jusqu’à la fin de la Seconde Guerre mondiale. À cette époque, le mot fest-noz n’existait pas* ». Pa soñjan e lâr tud zo ez eo ar ger *demat* a gaver implijet er XIV^{vet} ha XV^{vet} kantved (s.o. DEVRI) « brezhoneg artifisiel kondaonet gant ar Vretoned pur »...

An holl bennadoù zo dedennus, e gwirionez, daoust ma lez un nebeud anezho al lenner war e c’hoant. Un digarez da glask mont pelloc’h, neketa.

Mat ’vefe da bep Breizhad ha Breizhadez, kozh ha yaouank, d’an holl re a fell dezho ober anaoudegezh gant ar vro, lenn al levr.

Kaer eo kinniget an oberenn. Brav-kenañ eo ar skeudennoù ha degas a reont bepred pinvidigezh d’ar pennadoù.

Ur rebech : morse ne glever komz eus un embannadur e brezhoneg. Koulskoude e vefe pouezus-kenañ evit ar skolioù peurgetket.

**Histoire de Kabylie, Le
point de vue Kabyle,**
gant Youcef Zirem,
Yoran, 2016,
352 bajenn, 12€



Lenn a reer e dibenn al levr ez eo an trede embannadur. Diskouez a ra ez eo dedennet ar Vretoned gant istor Kabilia. N'eo ket souezhus pa soñjer er perzh bet kemeret gant brezel dieubidigezh Aljeria e dibaboù politikel un toullad Breizhiz yaouank er bloavezhioù 60 ha berzh arzourien evel Idir war un dachenn all.

Pemp chabistr a gaver en oberenn : *De la nuit des temps aux splendeurs numides* ; *Les dynasties berbères musulmanes* ; *Les Français s'emparent du pays* ; *L'Algérie devient indépendante*.

Ur bajenn warn-ugent evit teurel ur sell war ur prantad o vont eus 20 000 kent J.-K. betek 647 goude J.-K. 19 evit tizhout 1465 ha 16 evit mont eus 1465 da 1830. Er pevare chabistr (1830-1962) en em gaver buan er stourm evit dieubiñ Aljeria

(p.92 : *l'idée d'indépendance*). War an 266 pajenn a ya d'ober ar pemp chabistr ez eus 175 o plediñ gant an istor tost. Gellout a reer kompren met arouez un digempouez eo. Ar santimant a zigempouez zo kreñvaet gant an doare digempenn mèo kinniget al levr. Re stank, re nebeut a droc'hoù hag a rannoù sklaer. Darn eus al lodennoù zo diaes spontus da lenn : tremen a reer eus un danvez d'egile war memes linenn hep an disterañ troc'h. Ma vez adembannet al levr e vefe ret kinnig gwelloc'h al lodenn betek 1920, gant rannoù sklaeroc'h ha kartennoù a sikourfe da gompren an darvoudoù. Mat 'vefe d'an eil lodenn (stourm evit an dieubidigezh ha stad Kabilia er republik aljerian abaoe) bezañ berraet hag urzhiet.

Daoust d'ar c'hostez foutouilhek

e tesker ur bern traoù. Mard eo anavezet Sant Eosten n'òn ket sur e vefe anavezet kement roueed Amazig Afrika an Norzh, ar faraon Sheshonq (pe Sheshnaq), un Amazig ha diazezer XXII^{vet} remziad roueed Egipt pe merc'hed evel ar rouanez Kahina, pe ar stourmerez Lalla Fdhma N'Soumer (1830-1863). Mat eo degas da soñj e oa Amaziged renerien rouantelezhioù muzulmat Spagn. Ne soñj ket din e oa kalz Arabed en arme bet harzet e Poitiers gant Karl Martell e 732... En eil lodenn e verzer plas an Amaziged er stourm evit dieubidigezh Aljeria hag an doare spontus ma 'c'h int bet gwallgaset gant ar ren aljerian goude an dieubidigezh daoust da galz uhelidi bezañ Amaziged o-unan ! Deskiñ a reer traoù diwar-benn barzhed, skrivagnerien ha kelaouennerien, ar strolladoù politikel, ar stourmoù hag an disrannoù e-touez ar stourmerien. Deskiñ a reer traoù a-zivout politikerezh ar Stad enep an tamazigteg betek ar c'hemmoù erruet nevez zo. Gwelet a reer ivez stad ar yezh hag al lennegezh. Met pebezh dizurzh...

Marteze ez eus un diouer a adlenn ? Pa lenner p.35 « 868 *Publication en Chine du premier*

livre imprimé » ha pelloc'h « 1450 *Gutenberg invente l'imprimerie* » ez eus peadra da vezañ un tamm souezhet. Ken souezhus all : « *La ville de Tahert est ainsi détruite et ses habitants massacrés et contraints à l'exil* ». Domaj eo rak dleout a reer c'hwitout war draoù dedennus-tre abalamour d'an doare m'eo kinniget an destenn. Danvez a zo el levr koulskoude. Lennit anezhañ daoust da bep tra...

**Des GRAINES sous
la NEIGE, Nathalie
Lemel Communarde et
visionnaire,
istor gant Roland Michon,
tresadennoù ha livioù
gant Laëtitia Rouxel,
Locus Solus, 2017,
144 fajenn, 20€**



Ul levr bannoù-treset tev eo *Des GRAINES sous la NEIGE*. Komprenet e vez buan rak ne vefe ket bet posupl kontañ kemend-all a draoù war-hed 48 pajenn nemetken. Dedennuskenañ eo buhez Nathalie Duval, gwreg Jérôme Adolphe Le Mel (skrivet goude Lemel). Ganet eo bet e Brest d'ar 24 a viz Eost 1826 hag aet da Anaon d'an 8 a viz Mae 1921 en Ivry-sur-Seine. Istor Nathalie hag istor stourm ar re vunut hag ar vicherourien dreist-holl zo mesket a-hed al levr gant gwir abeg : ur stourmerez eo bet adalek he bugaleaj (hervez al levr da nebeutañ) ha bet eo bet unan eus renerezed aozadurioù merc'hed Kumun Pariz 1871. Stourm a rae enno gant Elisabeth Dmitrieff bet kaset gant Karl Marx ha Kevredigezh Etrebroadel al Labourerien, evit gwelet petra a c'hoarveze ha chomet da

stourm gant ar Barizianiz. Tost eo bet ouzh Louise Michel eveljust. Heuliet e vez ar stourmoù sokial ha politikel an XIX^{vet} kantved dreist-holl etre 1861 pa erruas Nathalie e Pariz, ha 1871. E-touez an dud a gejer ganto e c'heller menegiñ Courbet, Monet, Vallès, Henri Rochefort hag Eugène Varlin. Ne vez ket distaget an oberoù fetis (harzoù-labour evit gwellaat ar goproù ha digreskiñ niver an eurvezhioù labour, aozadurioù kenskoazell, stourm armet...) diouzh an daeloù teorikel : gwirioù ha plas ar merc'hed, pouez an deskadurezh, penaos aozañ ar stourmerien, peseurt ekonomiezh en dazont, an etrebroadelezh, saviad ar pobloù gwasket... hag ur bern traoù all. Dre vras e ya ar mennozhioù war-du ar gevreadelezh hag ar genetreouriezh ha n'eo ket war-du ur sokialouriezh stadelour.

Ar mennozhioù o deus awenet an “eil tu kleiz” e Frañs hag an ekonomiezh sokial ha ken-gret, hag an anarkourien ivez... E fin al levr e kaver anv lod eus ar stourmerien bet kaset d’ar galeoù e Kaledonia-Nevez goude ma vefe bet drouklazhet ouzhpenn 20 000 stourmer ha stourmerez gant soudarded Versailles e miz C’hwevrer 1871. Kalz emzalc’hioù balc’h, kalz kenskoazell met ivez traoù mantrus peogwir e ya lod anezho da sikour an arme da stourm ouzh ar Ganaked. Diazezet eo al levr war dielloù istorel sirius ha koulskoude n’enaouer ket. Ret eo lenn anezhañ hag ober anaouedegezh gant ur plac’h dreistordinal n’eo ket anavezet a-walc’h.

Deskiñ a reer ur bern traoù en teuliad istorel a gaver er fin. Un dra dipitus koulskoude : an doare ma vez displeget an anv Lemel. Kenkoulz eo din adskrivañ ar pezh a gaver en notenn (p.134) evit ma c’hellfe hol lennerien ober o soñj : « **Lemel** : *Le terme mael (énorme) (sic) est à l’origine (sic) du prénom moderne Maël, nom d’un des saints fondateurs de Bretagne (sic). À ce jour...* » Diaes eo kavout kement a sotonioù en ur frazenn. Eüruzamant ez

eo kalz siriusoc’h peurrest al labour.


Evit echuiñ : ne vefe ket fall d’ar re a glask anvioù merc’hed evit ruioù bourkioù pe kêrioù Breizh soñjal e Nathalie Duval, gwreg Lemel...

PETRA NEVEZ ?



**Herve LATIMIER,
Emmanuel PASTORI &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Kaour ar Barzh, Galeour,
gant Fulup Lannuzel,
Al Liamm,
250 pajenn, 14 €



Ur paotr yaouank eo Kaour. Rebechet e vez dezhañ bezañ gwerzhet ha kanet kanaouennoù war follennoù distag a-enep d'ar Republik.

En em gavout a ra neuze gant ur bern tud kaset d'ar galeoù, ha mont a ra ganto betek Brest war droad evit bezañ barnet.

Nec'het bras eo. Da gentañ penn emañ an Dispac'h gall en e

washañ. Mare sponterezh Robespierre an hini eo, hag ar varnerien ne chomont ket da dortal evit kas an dud d'ar marv, hag ar pezh a vez rebechet dezhañ a zo trawalc'h evit bezañ dibennet.

Gwashoc'h en deus bet graet koulskoude, peogwir en deus bet graet floderezh gant ar Saozon, enebourien douet Bro-C'hall d'an ampoent.

Dre chañs evitañ ne vo ket dibennet, peogwir eo bet diskaret Robespierre. Distanañ a ra un tamm an traoù. Kon-daonet e vo memestra d'ar galeoù, ha setu al lenner oc'h ober anaoudegezh gant ar bed-se.

Nebeut a dud a oar bremañ petra 'oa ar galeoù, ha ne ouien ket kalz muioc'h eget Yann lenner, ret eo din anzav. Ur romant istorel hon eus amañ, ha titouroù a-feson a vo kavet a-hed al lennadenn o tezrevell ur gevredigezh kalet, gant he reolennoù dezhi.

Evidomp-ni e seblant ar galeoù bezañ heñvel a-walc'h ouzh ar goulag. Ar c'helloù a zo bras-divent, chadennet eo an dud, ha ne dalv' ket ker kroc'hen ur prizoniad...

Gwelloc'h eo evit kement den kaset d'ar galeoù bezañ ampart war ur vicher resis, ne vo ket kaset d'ar "skuizhder bras", met d'ar "skuizhder bihan" nemetken, da lavaret eo labourioù kalz siouloc'h.

Setu ar pezh a c'hoarvezo evit Kaour. Desket ar paotr, bet e skolaj Landreger pa oa yaou-ank, gouzout a ra lenn ha skrivañ, hag a-bouez e vo evitañ...

Ar birvilh a oa d'ar marehont er gevredigezh a-bezh a zo dezrevellet en un doare splann, met ne vez ket kinniget evel ma vije ur gentel istor. Setu ar pezh am eus kavet dispar ivez.


Ur romant plijus-kenañ eo. Skrivet eo brav, ha c'hoant en devez al lenner da c'houzout petra a c'hoarvezo d'an haroz ha d'e vuiañ-karet, rak un istor a garantez a vo kavet el levr ivez, hag ur bern traoù all ne vefont ket diskuliet amañ.

Gwelloc'h eo prenañ al levr-mañ neuze, ha kaout plijadur gantañ. Ar re a zo tik gant an istor a gavo o gwalc'h, hag ar re all ivez.

Ar vioù-koukoug a vez kavet en destenn (renablet int bet e *Notennoù* niv. 443 AL) n'int ket re dorr-penn, hag al lenner(ez) ne vo ket chalet gant ken nebeut a dra.

EP

**13, straed ar
Skav-gwrac'h,**
gant Loeiza an Duigou,
Keit Vimp Bev,
118 pajenn, 8€



Ar romantig-se, eus rummad *Priz ar Yaouankiz*, a zlefe plijout d'ar grennarded yaouank. Leun a faltazi eo, betek bezañ diroll un disterañ. Mestroniet eo an danevell koulskoude. Loeiza an Duigou, nevez deuet war leurren hor skrivagnerien yaouank, a oar kas an den.


Emañ Halloween o tostaat. Dilojañ a ra Sally hag he zad evit annezañ e ti ur voereb kozh, hag a zo aet da Anaon e degouezhioù amsklaer. Kevrinou zo o plavañ etre mogerioù tort ar savadur. Annezidi an estajoù all a seblant kuzhat sekredoù dañjerus. Ha tammha-tamm e teuer e-barzh ur bed a hudouriezh gwenn ha du...

Gotek eo an amva, hag intret gant fent saoz. Kaset omp gant Loeiza an Duigoù betek ar par pellañ. Treuzet eo al levr gant daveennoù liesseurt, anat pe get,

eus *Harry Potter* da *Frankenstein junior*. Kriz ha fent neuze. Ur c'hoktel am eus lipet evel ul lommig boñboñ kredañs ! Santet e vez e skriv Loeiza an Duigou gant plijadur, ur blijadur aes da genlodañ.

MbdB

Inosant,
gant Paskal Hervio,
Al Liamm,
52 bajenn, 6€



Emañ Inosant, bleiner kirri-boutin o tihuniñ en Ospital. Gloazet eo, korf hag ene.

Asantet en doa kas ur strollad skolajidi da Vro-Euskadi evit ur veaj skol a-raok mont war e leve. Petra 'oa c'hoarvezet 'ta ?

Setu ar pezh he deus c'hoant da c'houzout Hamiltona Murnau, ar boliserez yaouank karget eus an enklask.

Aet eo an traoù da fall, anat deoc'h.

Neuze e krog Inosant gant dezrevell ar veaj. Adalek ar penn-kentañ e oa bet kudennoù evit ar paourkaezh bleiner. Ur skolajiad a vanke, Filias e anv, ha dale a oa bet tapet gant ar strollad diouzhtu.

Lesañvet eo ar c'hlasad-mañ, an trede torr-revr gant ar skipailh pedagogel gant gwir abeg hervez Inosant. Setu ar

pezh a gont da Hamiltona, met douetañs he deus.

Gwashoc'h-gwashañ e oa bet an traoù neuze goude bezañ loc'het eus ar skolaj, hag ur wezh erruet e Bro-Euskadi ne 'z eas ket gwelloc'h.

Ne oa ket bet gwelet Filias an devezh kentañ, nag ar skolajiad a roe bod dezhañ, peadra da vezañ nec'het...

Ankeniet-holl o doa dibabet ar gelennerien mont da gerc'hat an daou grennard, met ranket o doa ober hanter-dro, kement aerc'h a oa war an hent.

An deiz war-lerc'h e klaskas unan anezho mont da welet e peseurt stad e oa an traoù. Kelenner war ar sport e oa, ha mont a reas di war varc'h-houarn ar wezh-mañ.

Met ne zistroas ket...

Al levr-mañ a c'hall bezañ lennet gant pep hini. Ar grennar-

ded a gavo un istor ankenius ha fentus war un dro, hag ar re deut a gavo anezhañ plijus-tre ivez moarvat, dreist-holl gant an arouezioù kuzhet en destenn, anv an enklaskerez da skouer.

Anvioù an tudennoù a zo farsus. Rener ar skolaj a zo Gwadeg e anv, Spontana ar gasourez a ambroug ar strollad...

Skrivet brav eo al levr-mañ. Un den gour a gompreno buan

a-walc’h neudenn an istor, met bez’ en do plijadur o lenn an danevell betek penn memestra, peogwir e oar ar skrivagner broudañ al lenner.

Grit evel an enklaskerez, selaouit ouzh dezrevell ar bleiner betek ar penn, kit buan da brenañ al levr neuze !

EP

Afer Faber,
gant Jakez-Erwan Mouton,
Keit Vimp Bev,
130 pajenn, 8€



Trenkañ a ra ar soubenn etre Mael hag Anna. Ur foeter-bro a zo eus Mael. Ur c’helaouer etrebroadel brudet eo. Ar vicherse n’eus ket tu mont warni diwar hanter, a-hervez. Ha n’en deus ket kemeret Mael kalz a breder gant e wreg hag e vab. Da be vad an titouroù-se ? Peogwir e vo aesaet deomp intent fin an istor, pa vo dibabet un hent dic’hortoz gant Mael. Eus tonkadoù ez eus


anv gant *Afer Faber*. Klask a ra an aozer kompren ha displegañ planedenn zivoutin e dudenoù. E chidouarn pusunet Siria omp kaset gantañ, e-mesk soudarded Bashar-al-Assad, soudarded Daesh, Kurded, Turked ha nerzhioù etrebroadel war ar marc’had... E-kreiz ar poultrage-se e labour ar simanterez Faber, o vevañ diwar-goust an holl dre werzhañ simant d’an neb a bae

ar priz... Aes e vo da Yann lenner keñveriañ gant Lafarge ha gant embregerezhioù liesvroadel all e-giz Dassault, peotramant gant an embregerezhioù bras a werzh laezh-poultr d'ar mammoù o vagañ en Afrika... Bihan ar skorpuloù pa vez klevet c'hwezh an arc'hant bras. Liammañ a ra Jakez-Erwan Mouton buhez ha tonkad an tudennoù ouzh al leurenn vrezel-se, ma ren ar follentez war palioù politikel ha relijiel digembesus. Dirouestlañ a ra an aozer ar gudenn evidomp, ken e teuer da gompren, well-wazh ar rag hag ar perag. Emglevioù berrbad, trubarderezh, bakshishoù druz, rañsonoù, drouk-

tuadurioù, bonelouriezh, muntrou... Ar vizer ekonomikel ha sokial eo gwir drelosk ar brezel. Ar re baourañ hag ar re wanañ eo ar re a bae ar priz uhelañ. Kalz traoù zo da zeskiñ gant *Afer Faber* neuze. War al leurenn c'heostrategel diouzh un tu, ha war leurenn an dibaboù buhez diouzh an tu all : penaos e teu Kurdezed yaouank da sevel un arme, penaos e teu ur paotr eus banlev ur gêr vras e Frañs da emezellañ e Daesh... *Afer Faber* a zo ur gelaouadenn binvidik ha birvidik, un enklask, un testiñ, ur romant du, du-pod zoken... Esper ha dizesper.

MbdB

**Amañ emañ an
amann, Mamm !**
gant Hervé Lossec,
tresadennoù gant Nono,
Skol Vreizh,
160 pajenn, 12€



Pa zigorer ul levr skrivet gant Herve Lossec e vezer en gortoz eus brezhoneg Leon, yac'h ha dibistik, hag eus ur spered skañv ha goapaus. Peadra

da voueta an dudi, kea ? Ha n'eo ket gant tresadennoù Nono na gant titl an torkad e vimp distroet diouzh an hent-se. Ar re a glask o flijadur gant *Amañ*

emañ an amann, Mamm ! a vo roet o gwalc'h dezho neuze. Pa vez lakaet ar gaoz war ar pran-tadoù m'eo bet savet an tiez-bank kentañ war ar maez, da skouer... Eno e vourrer gant *brèves de comptoir* eus ar c'hentañ troc'h.

Met fonnusoc'h an eostad, moarvat, ma taoler ur sell en amler. Rak etre bourd ha fars e vez lavaret ar wirionez da galz... Skoet on bet gant an danevell gentañ, da skouer, an hini he deus roet he zitl d'an dastumad. Ur paourkaezh mamm-gozh a zo o pediñ hag aspediñ en aner evit ma vo roet dezhi un tammig amann sall da ledañ war he bara... Ur gomeidienn gwall drist pa soñjer mat. Eno ez eus kont eus tud kozh dilezet gant o familh, tud bet laeret o frankiz diganto war zigarez kemer preder outo. Echuñ a reont o buhez berniet gant kozhidi all, ret dezho doujañ ouzh reolennoù Ti ar re gozh, ouzh urzhioù ar vedisined, ouzh youl o bugale... Un toullbac'h kotoñs... Peadra da c'hoarzhin glas, 'm eus aon... N'hellomp ket kreviñ war hon trankilite ken...


Fromet on bet ivez gant eñvorennoù bugaleaj an aozer er Goañv 1963. Kenavo dit frer

Jean, marvet e-kreiz da gefridi... Ne oa ket dous ar vuhez evit ar skol-lojidi. Met ne oant ket maleürus evit kelo. Leuniet mat an devezhiadoù labour, Sul-ouel-bemdez. Ha pa ziskennas ar gwrezverker betek 10 derez dindan mann, e 1963, ne voe ket kavet gwelloc'h diskoulm eget mont da redek er-maez bep tri c'hardeur... Gant istor *Ar c'higer hag ar bankour*, n'omp ket distoket diouzh ar goañv c'hoazh... Awenet eo gant un danevell skrivet gant Anne Guillou. Klevout a ra ar c'higer e bater gant e wreg, pa gemenn dezhañ he deus divizet mont kuit, goude ur vuhez sklavelezh...

Da betra e servij e lost d'ar c'hi ? en em c'houlenn Herve Lossec e fin al levr. Un digarez da brederiañ war endroadur ar brezhoneg(où) hag ar galleg(où) e Breizh, hag war ar plas a c'heller ober da gement spesad ki a zo hep mont d'an ifern. Farserezh, hiraezh, ha furnez... Soubenn an tri zraig, mit 'hu ?...

MbdB

Dindan ar seizh avel,
gant Fañch Rebours,
TES,
68 pajenn, 8€



Liammet eo Breizh ouzh danevelloù mor. Milieroù eus hor martoloded o deus treuzet-didreuzet ar morveurioù war-lerc'h o bara. Buhez ar vartoloded a oa kriz ha dañjerus. Beredoù pesketaerien vretan a gaver c'hoazh en Island. Gant div zanevell Fañch Rebours e vevomp gant moraerien Vreizh e deroù ar c'hantved tremenet, war-zu an Island, gant Aogust, ar mous yaouank, e-lec'h ma veze pesketaet moru, hag en tu-hont d'ar bed, gant kabhornerion, e-ser Klaoda, merc'h yaouank ur c'habiten kabhorner. Peadra da zesachañ lennerien yaouank, adalek 8 vloaz, en ur zisplegañ dezho ul lodenn eus hon istor. E-giz boaz, gant embannadurioù TES, e vez kinniget dafar pedagogel diouzh an druilh en-dro d'an destenn greiz : geriaouegoù, luc'hskeudennoù kozh, dielloù, kartennoù,

c'hoarioù, goulennoù... Skeudennaouet fonnus eo bet al levrig gant Agnès Guillot. Liv brezhoneg Bro-Oueloù zo war ar skrid, dre ma oa Pempoull brasañ porzh ar voruetaerien e Breizh. Ur benveg plijus ha prizius neuze.

MbDb

Diskornet,
gant Paol ar Meur,
Keit Vimp Bev,
64 fajenn, 6€




Skornet ha diskornet eo bet Aziliz hag he familh. Evit treuziñ an amzer ha kuitaat ur bed saotret ha vil. Ur wech dihunet o deus savet ar Gêr Gclc'hiek. Klask a ra ar gumuniezh tennañ he spilhenn er bed nevez-se. Ha n'eo ket un ebat. Mankout a ra pezhioù erlerc'hiañ evit lakaat ardivinkoù ar vuhez pemdeziek da vont en-dro, an tablezennoù, ar save-rezioù... N'eo ket evit eoulstrilh eo e vo disklêriet brezel neuze. Evit gwareziñ ar rivinoù ma vez kavet pezhioù erlerc'hiañ, ne lavaran ket. Un hañvaladenn varzhoniell eo romant berr Paol ar Meur. E-kichen bed an dud deuet, ha na gav diskoulm ebet en tu-hont d'an armoù, ez eus un hent eeunoc'h, ur vuhez dilontek, ma vev ar yaouankizoù dindanzour, e tier treuzwelus, maget gant frouezh an natur, e

kuzh, e peoc'h hag en noazh. Eus an distopiezh d'an utopiezh... Peadra da lakaat ar grennarded d'en em soñjal war techoù Mab-den, hag a seblant ken diaes o reizhañ...

Mb dB

E Kambr ar Stered,
gant Gégé Gwenn,
Keit Vimp Bev,
178 pajenn, 8€



Santet e vez un dra wirion adalek ar pajennoù kentañ, un dra bevet gant tudennoù kig hag eskern. Anvioù tud, anvioù lec'h, degouezhioù bet... E-giz ma vije kont eus ur gwir desteni. Hag ez eo, dres, diouzh a vo displeget gant an aozer er pajennoù diwezhañ. E fin an eil brezel bed emamp, e Kreiz-Breizh, e-touez annezidi ordin o vevañ darvoudoù dreistordinal. Tud ar vro a glask en em dennañ, pa ne glaskont ket tennañ an dour d'o milin. E-touez ar yaouankizoù, lod zo deuet da vezañ "harzerien", ha lod all, ur bihanniver, a zo aet da soudard er Bezen Perrot. Dibabet o deus kenlabourat gant al lu alaman, ha gwiskañ o lifre, gant ar spi e vo roet he frankiz da Vreizh goude ma vo aet ar maout gant Hitler, diouzh a gredont. Pep hini a gav dezhañ e vo trec'h

neuze. Paotred ar strouezh a c'hortoz sikour an Amerikaned tra ma kred paotred ar Vezen ez aio ar maout gant an Alamaned a-drugarez d'ar fuzeennoù nevez a zo war-nes bezañ peur-ijinet. Perzhidi an daou du a damall da berzhidi an tu all da vezañ treitourien.

Ar brezel... Tud gloazet, lazhet, boureviet, karantezioù freuzet en o bleuñv... Kazel-hakazel ez a ar gasoni hag an uhelvennad... Prantadoù teñval ma 'z eus. Yaouank-flamm eo ar penndudennoù. Ar yaouankizoù ne vez ket diaes plantañ soñjoù romantel en o fenn. Gégé Gwenn en deus tennet e spilhenn o tiskouez savboentoù enebet an dud dre lakaat pep hini da gomz tro-ha-tro. Soaig, Mari, Yann, mui ur pennadig gant Irène. Pep hini a gomz er c'hentañ gour unan. Un doare da vont hebioù

pej ar vanikeegezh. Soaig a zibab ar Strouezh, Yann a zibab ar Vezen. Mari a vag soñjoù dous evit Yann, met ne rann ket e vennozhioù. Aze emañ skoulm dramaek an itrik.


Diskouez a ra Gégé Gwenn penaos en deus muntr an aotrou Perrot taolet plouz war an tan. Displegañ a ra kenkoulz all an enebiezh etre Delaporte ha Lainé (Henaff). Klask a ra bezañ pedagogel. Chomet on war va c'hoant er c'heñver-se. *E Kambr ar Stered* a zo un testeni buhez, kentoc'h eget un testeni preder. Ur romant eo, ha neket un

arnod-skrid evel-just. Met pa ouzer pegen kizidik eo bet, hag ez eo c'hoazh, an prantad-se en istor an Emsav, edon en gortoz eus divizoù puilhoc'h etre an tudennoù a-zivout o dibaboù personel, just-a-walc'h. Berrha-berr e vez displeget mennozhioù an daou du...

Talvoudus eo *E Kambr ar Stered* avat. Buhezek eo an danevell. Hag un digarez e vo evit astenn ar gaoz gant al liseidi en ur vont en tu all d'ar mennozhioù prest-ha-tout... Gwelloc'h klask kompren eget klask barn...

MbdB

E seizh avel ar bed,
gant Fañch Peru,
Skol Vreizh,
96 pajenn, 12€



« Kuzh ha diglod », e chom Fañch Peru war e erv. Piv a oar en deus roet ouzhpenn ugent levr d'hon lennegezh. Berzh a ra, met ur berzh didrouz. Lod eus e levrioù a zo bet adembannet koulskoude : *Eñvorennoù*

Melen ki bihan rodellek, Teñzor Run ar gov... Barzh eo, en e greizig-kreiz, goude ma teufe komzoù plaen dindan e bluenn alies. Morse ne bella diouzh hentoù bleiz ar varzhoniezh, ha pa astennfe ar gaoz war kuden-


noù ar bed o treiñ, *E seizh avel ar bed*. Ar c'horc'hwezhioù-se a oar skubañ douaroù karet Bro-Dreger. E danevell gentañ an dastumad nevez-mañ, paneveti, ez euz anv eus familhoù adsavet, eus bedelaat an armerzh, eus feiz hon tadoù-kozh o vont da get, eus kudennoù an endro... Meur a wech e laka Fañch Peru an dodenn ziwezhañ-se war ar stern : *Ur vrec'h e-maez ar bezhin glas, Ar gwenan a ya da guzhat evit mervel, Ti kozh renevezet da werzhañ, Aloubet gant al lastez...* Ur bed ma vez lakaet an arc'hant bras e penn ar jeu, alies mat. « Ar pezh a vank eo an doujañs, » a lavar deomp gwenaner an eil danevell.

Eno hon eus d'ober gant sokiologiezh ha politikerezh zoken, a soñjo lod. Gant gwir abeg. Eus barzhoniezh em eus komzet evelkent. Rak al liamm a santan en don-donañ eo liamm ar varzhoniezh. Kaerded ar fromoù gwir, dirak an natur, dirak an dud ordinal o stourm evit tennañ beg o spilhenn... Brav en em gaver e bed hag e yezh Fañch Peru, ha pa ne ve ket e zanevelloù ken mat ha ken mat. Klozañ a ra e zastumad gant un haibun, da lavaret eo un destenn e komz plaen, marellet

gant un toulladig haiku, e-giz ma rae Bashô en e garnedoù beaj. Ur bourmenadenn hir a ginnig deomp an aozer war Enez-Veur. Dizingal eo an destenn ziwezhañ-mañ. Traoù dedennus a zesker memestra, diwar-benn chomadenn Joseph Conrad war Enez-Veur. An dud droch (*The idiots*) en deus skrivet eno. Ne zoug ket enor d'ar Vretoned, 'm eus aon... Kement ha kimiadiñ e kinnigan deoc'h ur berlezennig am eus dastumet en hent : « E palv ur vilienn / E sked un dakenn dourmor / Ankounac'haet. »

MbdB

**Chroniques d'un
peuple oublié,**
gant Yvon Ollivier,
Yoran embanner,
190 pajenn, 10€



Ne soñje ket din e vefe ken gwir ar frazenn a lenner e digoradur al levr : « *N'ai-je pas suffisamment exposé mes idées sur toutes ces questions dans de multiples ouvrages ? Pourquoi réitérer ad nauseam ?* »

E gwirionez em eus bet ar santimant adlenn bepred memes traoù gant dielfennadurioù reizh a-wechoù met diskoulmoù iskis... pa vez kinniget reoù. An ton prokolor enep an dilennidi, ha dreist-holl izili ar C'huzul rannvro, a gavan skuizhus ivez. Un dra a seblant ankouaat : unan eus perzhioù an dilennidi eo ez int... dilennet. Gant piv ?

Alies e kaver rendaelerezh diazezet war vrudoù nemetken, p.41 a-zivout Kuzul Sevenadurel Breizh, da skouer.

Gellout a reer kaout selloù disheñvel war an doare da stourm met perak implijout gerioù disprizus a-enep ar re a

zibab un hent pragmatek ? Ne vefe ket tu da eskemm hep eskumunugiñ ?

Diwar-benn stad ar yezh e kaver bepred memes keñveradennoù gant Euskadi, Korsika pe Elsaß diazezet war titouroù lemet diouzh o endro. Memes diskoulmoù bet lakaet a-gostez gant ar c'hevredigezhioù bras a ra war-dro ar c'helenn e brezhonég.

Memes randonerezh a-zivout plas ar servij publik ivez...

Da betra servij silañ dizemglev ha gervel d'an emglev goude ? Ne 'm eus kavet kinnig pleustrek ebet ; kalz "yakafokoñ" evel ma lârer e galleg. Da skouer, ne 'm eus james komprenet petra 'zegasfe d'hon stourm e rofe Paul Molac, Lena Louarn hag un nebeudig a re all o dilez diouzh ar C'huzul rannvro. Rak, anat, ne vefe tost hini all ebet o

reiñ e zilez. Gortoz a ran un displegadenn.

Lenn a ran p.101 « *Et “notre diginité, c’est nos langues” écrivis-je récemment...* ». Perak komz kement eus hon yezhoù bepred e galleg. Ne vefe ket un dislavar ?

N’ouzon ket pet gwech e kaver ar ger “*vieux*”, “*vieux peuple*”, “*vieux territoire*”, un tamm nec’hus eo. Hag an dazont ?

Un dra all a gavan dipitus : an toullad dielfennadurioù mat a

gaver zo beuzet en ur morad a draoù adlâret “*ad nauseam*”. Riskl bras zo chom hep gwelet anezho.

Un dastumad pennadoù bet embannet amañ hag ahont eo al levr. Pep pennad zo berr a-walc’h eta. Unan eus nerzhioù an oberenn eo : kavout un doare diverrañ eus mennozhioù Yvon Ollivier e 190 pajenn hep kaout ezhomm da lenn al levrioù all.

HL

NOTENNOÙ



**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

HOR MIGNONED

Kañv :

Aet eo Gwenaël Huon da Anaon d’an 22 a viz Ebrel. 69 bloaz e oa. E obidoù a oa bet dalc’het d’ar 26 a viz Ebrel e Pleuwigner.

Ur wech paket ar C’hapes saozneg gantañ e oa aet da gelenn e norzh Bro-C’hall hag en Normandi. Goude un toullad bloavezhioù e maez a Vreizh en doa bet ur post kelenner e Sine.

Rener stajoù brezhoneg KEAV e oa bet adalek 1977 skoazellet gant Anna ar Beg.

E-pad bloaz en doa stourmet kalonek ouzh krign-bev ar skevent en aner.

Resevet hon eus ur bern posteloù a vignoniezh, setu unan anezho, digant P. M., bet o teskiñ brezhoneg gantañ :

« Tristaat keloù gant marv Gwen ! Soñj ’m eus eus stajoù KEAV, ha Gwen, aozer, buhezour, o reiñ lusk d’an traoù bepred, jentil gant an holl, prest da doullañ kaoz gant tout an dud ha dreist-holl gant ar stajidi nevez degouezhet evit un degemer a-feson. Kalon hag ene KEAV e oa. Gwen zo bet unan eus ar re o deus broudet ac’hanon da vont pelloc’h gant ar brezhoneg. »

Aet eo Angèle Jacq da Anaon d’an 12 a viz Ebrel e Kemper hag hec’h obidoù a oa d’ar 17 a viz Ebrel e Landudal. Ganet ’oa bet e Landudal e 1937 en un tiegezh kouerien. O terc’hel menaj e oa bet

ha goude he doa bet meur a vicher. Kuzulierez-kêr e oa bet e-pad 6 vloaz e Landudal. Skrivet he deus bet pennadoù liesseurt ha romantoù, e galleg peurliesañ. E 1999 e oa e-touez sinerien Galv Karaez, prezidantez ha mouezh-aotreet an aozadur e oa. Enoret e oa bet gant Kolier an Erminig e 2003. Bep bloaz e veze gwelet e Gouel al Levrioù e Karaez, bepred mousc'hoarzhus ha laouen he dremm. E 2010 e oa bet prezidantez a-enor ar Gouel.

Merdeñ 'ra-hi bremañ etrezek aodoù enez Avalon (frazenn kemenn kañv).

Pried hor c'houmananterez Annie Coz, Jakez Cosquer, a zo aet da Anaon d'ar 27 a viz Ebrel, e Roazhon. 77 e oa.

Douaret eo bet d'an 30 a viz Ebrel e bered Ar Gelveneg.

E 1979 gant un toullad tud all, e savas an APEEB (*Association des Parents d'Elèves pour l'Enseignement du Breton*). Prezidant ar gevredigezh e chomas etre 1979 ha 1984. E 1995 e voe roet an anv *Div Yezh* d'ar gevredigezh-se.

Ra vo skañv douar Breizh evito.

PROFOÙ

Miz Ebrel : Marc GUIRIEC ; Erwan-Weltaz VALLERIE ; Iwan AR FUR ; Jean-Yves QUERE ; Maryvonne CUDENNEC ; Paol AR MEUR ; Paskal TABUTEAU ; Paul AUFFRET ; Luc BIDEL
— War un dro : 145€

Miz Mae : Paskal HERVIO ; Dr Yves GOURVES ; Herve AR GALL ; Yves Kernalegenn ; Jean-Claude LE THOMAS ; Herve GOUEDARD ; Jean-Luc GUINAMANT ; Kristian AR BRAZ
— War un dro : 250€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

Postel digant Fulup Lannuzel :

E-barzh *A-dreuz lenn*, e niverenn diwezhañ **Al Liamm**, e ra dave Herve Latimier da levr Frédéric Lenoir, *Le Christ philosophe*. Un tammig dre zegouezh em boa bet tro da lenn en hevelep mare, levr David Gowler, *Petite histoire de la recherche du Jésus de l'Histoire*. El levr-se e kaver an enklaskoù diwezhañ renet gant ar viblourien saoz hag amerikan a-zivout ar Jezuz istorel. Diskouez a ra eo bet Jezuz war un dro un diouganer eskatologel evel Yeshaiia pe Yehezkel hag un diouganer o prezeg ar reizhded kevredigezhel hag armerzhel, evit ur bobl gwasket. Sklaer e komze en anv kouerien hag artizanet bet kouezhet en dienez da-heul ar c'hêriekaat lusket gant Herodez, e gounid perc'henned vras e Galilaea. Gwasket e oa ar werin gant ar Romaned ha pennoù-bras ar Yuzevien. Alese ar giminiadezh embannet evit ar re reuzeudik : adingalañ pinvidigezh ar re binvidik e gounid ar re baour, hep gortoz netra en eskemm (Luk. 14, 1-24), ha stourm en un doare anfeuls evit diskuliañ ha dont a-benn eus an direzhderioù.

Neuze Jezuz, unan eus andonioù ar sokialouriezh ? A c'hell bezañ. Soñjomp e “Teologiezh an dieubidigezh” pleustret e Suamerika, er pezh a lavare ar prederour Michel Henry diwar-benn Marx evel prederour “kristen”...

Evit echuiñ, pa veneg ar pennad « An inkizitur meur », e-barzh *Ar Vreudeur Karamazov*, e ve poent treiñ an destenn-se, anezhi ur bennoberenn eus al lennegezh vedel e brezhoneg ; kemenn 'ta da Yulia Borisova pe da Anna Mouradova...

Lizher digant Herri an Haridon, Kemper :

Emaon o paouez lenn *Pellgent Loc'h Laoual* gant Youenn Drezen. Trugarez d'*Al Liamm* evit an embannadur-se. Trugarez ivez d'ar re o deus lakaet notennoù e traoñ ar pajennoù evit sikour al lennerien.

C'hoant am befe d'ober un evezhiadenn pe ziv, koulskoude :

- Diwar-benn an notenn 25 er bajenn 69 a-zivout « ha setu me aet, evit pemzek deiz bennak, da glasker skubellennoù-bag ».

An notenn a lavar : « da glasker = da glask ». Ne gav ket din. Amañ « mont da » n'eo ket « mont kuit evit klask un dra bennak » (da skouer : He mab zo aet da glask avaloù), met « dont da vezañ » (da skouer : He mab zo aet da alvokad... pe da glasker-bara, da glasker-boued). Joz zo aet da glasker skubellennoù ; e “vicher” eo e-pad ar pemzek deiz-se.

- Diwar-benn an notenn 49 er bajenn 104 a-zivout « kapoù beleien hag efodoù Yuzevien ».

An notenn a lavar : « efodoù : efed, efod... » Ar ger “efed”, diwar ar galleg, a sinifi “devouded” evit an dud desket, ar pezh a zeu war-lerc'h ur gaoz. Met ar ster *les effets* = *an dilhad* n'eo ket bet amprestet gant ar brezhoneg, din da c'houzout.

Nann, amañ ar ger a zo skrivet “*efod*” gant un o. Ur ger hebreek eo, deuet dre ar gregach (hag al latin) : setu perak e vez skrivet gant ph e galleg hag e saozneg, da skouer¹.

Ar geriadur *Le Robert* a lavar : « *éphod* = sorte d'écharpe de toile que portaient les lévites, les prêtres hébreux ».

Ar geriadur *Chambers* a lavar : « *ephod* = kind of linen surplice worn by the Jewish priests ».

Ur skerb ? Ur sourpiliz ? Ar pezh a zo sur eo e oa ur pezh dilhad evit beleien ar Yuzevien gwechall-gozh.

Ménard a skriv : « *éphod* = *efod* » en e c'heriadur. Ha devri : <http://www.devri.bzh/dictionnaire/e/efod/>

Kemeromp *Ar Bibl lakaet e brezhoneg* (Penkermin, 2018) er bajenn 82 : Levr an Ermaeziadeg, pennad 28, gwerzad 2. Setu ar pezh a c'hellomp lenn : « Hag e ri gwiskamantoù santel da Aaron, da vreur, glorius ha meurdezus. Hag e komzi ouzh an holl dud ampart, am eus leuniet gant ur spered a furnez, hag e raint gwiskamantoù Aaron, evit e santelat, ma vo beleg din. Ha setu ar gwiskamantoù a raint : ur brennid, un efod, ur sae, un doneg stamm, un tulban hag ur gouriz. »

1 E kembraeg e vez skrivet *effod*, evel-just. *Y Beibl Cysegr-Lân*, Pennod 2 : « Dwyffronneg, ac effod, mantell hefyd, a phais o waith edau a nodwydd, meitr, a gwregys... »

An efod a zo meneget ivez er memes pennad er gwerzadoù 4-14 (p.82), e Levr kentañ Samouel 2.18 (p.238), 22.18 (p.257), 23.9-12 (p.258) hag e Eil levr Samouel 6.14 (p.271).

A galon.

DAOU ARLOAD NEVEZ _____

- myOcéanopolis a zo un arload-gweladenniñ etreberiat hag a c'haller implijout e brezhoneg ! Gantañ e c'haller aozañ e weladenn evit ober e vad eus ar Greizenn a sevenadur skiantel gouestlet d'ar Mor diouzh ar gwellañ.

- Kiou (*Antur Cyw* e kembraeg) a zo an arload kentañ e brezhoneg evit deskiñ en ur c'hoari savet evit ar vugale. Krouet ha diorroet eo bet gant ar chadenn skinwel hollgembraek S4C. Kavet e vez ennañ a bep seurt c'hoarioù evit ar vrezhonegerien yaouank adalek ar mare ma teskont skrivañ. Un ostilh a zere eo ivez evit an holl re a zesk hor yezh hag ar gelennerien zoken.

LEZENN MOLAC : SKARZHET KUIT AR PEP TALVOUDUSAÑ _____

Dared ha kurun d'ar Gwener 21 a viz Mae. Skarzhed diazez lezenn Molac. Re aes e oa bet degemeret. Hiziv ez eus peadra da soñjal oa bet raktreset ha labouret a-feson kement tra gant ar galloudoù stad evit gallet flastrañ da vat ha lakaat un termen en un doare lezennel d'ar soubidigezh hag en ur mod d'ar c'helenn divyezhek, war dachenn ar C'hwec'hkorn. Dilennadegoù a vo d'an 20 ha 27 a viz Even. Daoust ha krediñ a raio ar Vretoned diskouez o fulor hag o youl ? Penaos en ober ? El latar emeur, klevet ha lennet e vez a bep seurt diwar-benn an danvez-mañ.

NAC'HEG AN DILDENN _____

Ha p'emaint ganti e skoont kaletoc'h c'hoazh gant ar penn-bazh. Tildenn pe get ? Ket ! N'eus nemet ar galleg a zo aotreet ha degemeret. Aon o deus rak an holl yezhoù minorelaet war dachenn ar Frañs. Saozneg a vez klevet forzh pegement er radioioù pe chadennoù skinwel. Met dañjerus ez omp-ni, evit doare. Ni hag a zo holl gallegerien ac'hanomp koulskoude...

AR REDADEG 21-29 A VIZ MAE _____

D'ar Sadorn 22 a viz Mae 'oa loc'het Ar Redadeg a oa sañset da vezañ bet dalc'het warlene. An hentad a yae eus Karaez da Wengamp. 1861km o deus kavet rederien, etre 6 eur beure ha 9 eur noz. Ne oa ket aotre da redek e-kerzh an noz. Heol, koumoul, glav, avel... a bep seurt amzerioù o deus heuliet ar rederien a bep oad. Hag an holl prederiet gant un darn eus lezenn Molac bet kaset d'ar blotoù ken aes ha tra gant galloud kreizennet ar Stad c'hall. Peadra da vont en tu-hont d'ar fulor !



©HL2021

Herve Huon o redek kilometr Al Liamm

MANIFESTADEG 29/05 E GWENGAMP

Raktreset e oa bet manifestadeg Gwengamp evit degouezh Ar Redadeg. Pa oa bet embannet gant ar C’huzul Bonreizhel e vefe er-maez al lezenn an deskadurezh dre soubidigezh eo bet galvet gant meur a aozadur en em strolañ e Gwengamp d’an 29 a viz Mae evit lakaat hor mouezh da vezañ klevet.

Ha klevet eo bet ! Ouzhpenn 10 000 den a oa o tibuniñ e straedoù Gwengamp evit difenn hor yezh hag hor skolioù, divyezhek pe dre soubidigezh e vefe. Mediaoù ar C’hwec’hkorn a oa eno ivez, kement ha diskouez da dud Bariz kounnar ha digomprendidigezh ar Vretoned.

E norzh Bro-C’hall, en Elzas, Korsika, er Pireneoù, hag e Bro-Euskadi e oa bet aozet manifestadegoù ivez. Estreget e Bro-Euskadi ne oa ket kement a dud, met diskouezet hon eus pegen kreñv hag unvan e c’hallomp bezañ.



VAKANSOU.UBAPAR.BZH

Ul lec’hienn nevez gouestlet d’an dudi e brezhoneg ha gallaoueg : vakansou.ubapar.bzh !

Gallout a rit mont da welet ar c’hampoù vakañsoù e brezhoneg hag e gallaoueg a vo kinniget d’ho pugale en hañv-mañ.

Temoù disheñvel a zo : oberiantizoù war vord ar mor, kaiak, surf, dizoloiñ kêr, c'hoarioù ha pourmenadennoù er c'hoadeier, c'hoarioù bras... Kavout a reoc'h war al lec'hienn darempredoù an aozerien hag an doare d'ober evit enskrivañ ho pugale.

DISKOUEZADeg X. LANGLEIZ E LANNUON _____

Un diskouezadeg a vo e Chapel an Ursulinezed e Lannuon, gant un dibab eus oberennoù hol liver ha skrivagner meur bet ganet e Sarzhav d'ar 27/05/1906 hag aet da Anaon e Roazhon d'ar 15/06/1975.

Digoret e vo ivez Chapel Sant-Josef ar skol brevez, enni livadurioù Langleiz. Eus an 3 a viz Gouere betek an 9 a viz Here e vo dalc'het an diskouezadeg-mañ.

GOUEL BROADEL AR BREZHONEG _____



Dalc'het e vo e Langoned d'an 2-3 ha 4 a viz Gouere. D'ar Gwener eo an 11^{vet} Taol-Lañs a vo aozet. Ekoreizhiad ar brezhoneg bodet e-pad 2 zevezh eo ar festival GBB.

Brezhoneg war al leurennoù, er stalioù, war ar skrammoù ! Evit c'hoari hag evit deskiñ !

Brezhoneg e pep lec'h, war ar blasenn hag ouzhpenn !

Ur gouel ken liesseurt hag ar brezhoneg bepred gant liv ar stourm : Brezhoneg ofisiel, sed aze an ahel !

Donemat er festival GBB neuze !
Yezh ar bobl, yezh ar vro !

D'an 10-11 a viz Gouere e vo aozet Ar Merk-Aod (*Le Marque-plage*) e Tregastell. Ouzhpenn kinnig levrioù gant embannerien Breizh, ha sinadegoù gant ar skrivagnerien ha skrivagnerezed pedet, e vo aozet kaozadennoù ha breutadennoù e galleg hag e brezhoneg.

Ditour ha programm : www.tregastell.fr/le-marque-plage

STAJ E NAONED GANT SKOL AN EMSAV HA KENTELIOÙ AN NOZ

5-9 a viz Gouere - Staj digor d'an holl liveoù ! Skol an Emsav (Roazhon) ha Kentelioù an Noz (Naoned) a ginnig deoc'h ur sizhunvezh staj dudiuz, plijus ha pleustrek en ur greizenn gouestlet d'ar brezhoneg e bro Naoned. Ur staj bod-ha-boued e vo ivez, evit ar re o devo c'hoant da vrezhonegañ noz-ha-deiz e-pad ar sizhun (predoù, beilhadegoù...). Kentelioù a vo war an deiz ha meur a live a vo kinniget. Pep hini a c'hall mont war-raok, diouzh he/e lusk ha diouzh he/e live.

E 2021 e kinnig ar skipailh mont da zispenn roudoù maouezed eus Naoned dibar o flanedenn. En o zouez, ar gourserez Julienne David, ar skrivagnerez hag arzourez Claude Cahun, ar rezistantez Josette Bocq, hag evel-just, an hini vrudetañ moarvat, Anna Vreizh. Mont da vale ha da weladenniñ Naoned war seulioù ar maouezed dreist-ordinal a vo graet, kement hag ober gant ar brezhoneg e-maez ar c'hentelioù. Un digarez a-feson da bleustriñ war ho prezhoneg gant plijadur !

Mont e darempred gant : degemer@skolanemsav.bzh

02 99 38 75 83

pe kenteliouannoz@gmail.com

02 40 20 39 74

LIGER-ATLANTEL E BREIZH _____

Ur mil bennak a dud a zo en em vodet e Redon d'ar Sadorn 5 a viz Even. Bro Naoned e Breizh ! Ur wech c'hoazh. Referendom ebet war wel, padal e kaver un dregantad brasik a dud a-du gant mennozh adkavout an departamant 44 e Rannvro Breizh.

DIWAN : UR PREZIDANT NEVEZ _____

Goude tremen 6 vloaz e penn Diwan he deus Stéphanie Stoll lezet he c'harg. Yann Uguen eo a zo prezidant Diwan bremañ goude bezañ bet teñzorer ar gevredigezh. Morgan Champion a chom eilprezidantez e karg eus an eil derez hag e karg eus ar c'hentañ derez emañ Anne-Sophie Brats. Yves-Marie Derbre-Salaün a zo-eñ e penn ar vuhez kevredigezhel. Kargoù divent ha ponner int bepred rak rankout a ra Diwan talañ ouzh a bep seurt korventennoù ha gouzout gwareziñ he skolioù ha kas war-raok he falioù.

FIN AR BED – EIL LODENN _____

Skignet eo bet d'al Lun 17 a viz Mae heuliad *Fin ar Bed* war France 3 Breizh. Al lodenn gentañ a oa bet skignet e 2017. Ur stumm all a gaver : un heuliad 10 lodenn a zo un tamm disheñvel ha hiroc'h neuze evit ar film klok.

Adkavet a reer Mari, gwall skoet gant he buhez prevez ha labour aet da netra a-daol-trumm. Dilabour eo. Dianket. Teñval sac'h eo aerglec'h an istor. Emeur e-touez tud amsklaer, tavedek... hag ur Gembreadez o klask war-lerc'h he mab, Klet. Filmet ha frammet gwelloc'h evit al lodenn gentañ em eus kavet. Ne vo ket kontet re, plijusoc'h mont gant red an istor ha bezañ souezhet pe disouezhet. Daoust hag un heuliad a vo ? Peadra zo d'en em c'houlenn.

Damzigor eo an nor daoust d'an noz bezañ hep tamm steredenn
ebet en oabl moug.

<https://finarbed.bzh>